

GUERZ

AN

ITRON VARIA AN ENEZ

A baros Goudelin

C'hoant am eus da ganan un hymn melodijs
Da Vam hon guir Salver ; me ho ped, ma Jesus,
Obtenet d'in ar c'hraç da ganan'r miraclo
Ha d'annonci d'ar bobl dre oll he burzudo.

Me ho ped, christenien, deut assambles gane
Da baros Goudelin, d'an tabernacl neve,
Diredet gant fisianç da chapel an Enez,
Hag e vet consolet en ho tristediguez.

Bean 'deus ar pouar voar mor ha voar douar,
N'e deus man refuset digant he Mab, he c'har :
Arretin ra dre oll curuno ha luc'het,
Pa ve a vour galon gant an den invoquet.

Mor rust ha dinatur, elemant furius,
Gant ho flus ha reflu ha gant ho prut euzus,
Apeset hoc'h arach, cuzet ho menezio,
N'en em vontet pelloc'h voar hon enezenno.

Voar an douar on deus ive un enezen,
Hag a doug en he c'hreiz eur gouir sourdilisen,
Rozen mysterius so caer hag eloqant,
So mad ous pep clenwet, iac'ha antiaramant.

Tud cam, bouzar ha dall, quemeret oll calon,
En Enez emedi mam ar c'hraç, hon Itron,
Hag a so quen douguet evit ar gristenien !
Ha neb he invoco vo eurus da viquen.

Er blavez mil seiz cant ha goude pevarzec,
Dimeus a vis goulén, me gred, an ugentvet,
A savas un tempest, curuno ha luc'het,
A re d'an oll crenan, cavet spont ha morc'het.

An autro ar person, un den fur ha prudant,
En em apercevas a valiç eur serpent ;
A gommandas neuse monet timat en tour,
Evit son ar c'hleier da bellât'n adversour.

Pierr Maros, Claud Derrien ha Guillerme ar Voguer
A savas prest en tour evit son ar c'hleier,
Ha pa oant occupet, Satan, gant maliç vras,
Ar flam dan deus an ær voarneze a stringas.

Gant furi hag arach a deuas da stringan
Bec an tour d'an douar en avis d'ho lazan ;
An tri den a voa et evit son ar c'hlec'hi,
E tolas tan voarne en avis d'ho lisqui.

Draillet a oe d'unan un toq plous voar he ben,
He zillat, he voto, hep lisqui he groc'hen ;
Un all a oe tolet dimeus an tour en traou
Pemp troatad ha tregont, hervez mouez an testaou.

Un all a oe ruillet gant ar vîñç pen da ben
Hep cavet nep gouli, foulan nep goasien ;
Preservet int bet oll hep cavet drouc ebet
Gant Mari an Enez, mignonez d'an Drindet.

En paros Goudelin, Frances Moriç hanvet,
Greffier, den enorabl a guement a gavfet,
Oa et voar ar mor bras ; prest da vean beuet,
A sonjas en Enez, templ sacr ha biniguët :

« Goerc'hes Vari, emezan, mam a visericord,
• Pedet ho map Jesus ma'c'h ellin mont d'ar bord :

- » Hen en deus conduet ha gret da Ber querzet
» Voar ar mor pirillus, ha sant Paol goarantel. »

Sant Maur, abat Danio, a guerzas voar an dour,
Evit querc'hat Placit ha rei dean sicour,
Ha Remond voar'r mor bras cant lev en deus querzet,
Guessin voar he vauten en deus-an bagueet.

Claud Morvan en eur poull a deuas da goean,
Hep cavet nep sicour evit hen assistan,
O vean bet taer heur ebars er poull bras-se,
Goestlet oe d'an Enez, e man c'hoas en bue.

A baros Tressignaux, eur map da Ian Thomas
N'en defoa laret guir d'an oad deus a bemp bloas,
Inspiret oe e dad dont d'an Enez gantan,
Ma prononças *Jesus*, quent evit sortian.

An itron Sedeac, eus a famill Durant,
A oa 'boe cals amzer he c'halon languissant
Gant clenvet violant pini he zourmante,
E defoe ar iec'het dre c'hraç Mam an æle.

Un itron inspiret, un nosvez o souffr poan,
A bedas ar Voerc'hes da dont d'he assistan,
A droas he offranç da chapel an Enez,
M'e defoe ar iec'het digant Mab ar Voerc'hes.

An autro Goastino a oa abandonnet
En clenvet violant gant ar vedicinet;
An itron he bried a deuas d'hen goestlan,
M'en defoe ar iec'het; e man c'hoas o vevan.

En castel Toul-Porjo, voar bord a Blesidi,
A grogas an tan-goale en danjer da lisqui :
Ar belec deus an ti a ies prest d'an daoulin,
Hen goestlas d'an Enez, en paros Goudelin.

Hag er memes amser m'en defoa invoquet
Ha pedet ar Voerc'hes, mam an orphelinet,
E teuas an tan-flamm da vean oll mouguet :
Quemeret oll confort en Mari viniguet.

A baros Goudelin, map Frances ar Goallec,
O vean dispos mad'n he voele o cousquet;
Mæs pa savas he dud ar beure da voelet,
Ne elle laret guir na querzet eur c'hammet.

He dad paour desolet, pa oelas quement-se,
He vuguel percluset ebars en he voele,
E troas he offranç d'an Enez viniguet,
Voarben neubet goude en defoa ar iec'het.

N'en deus den er baros nag ive er c'hanton
N'o deus goelet an tan crog en Poull-ar-Baron;
Un tan euzus meurbet ac'h allje ravajin
Oll tier deus ar bourg hep hini reservin.

Habitantet ar bourg eure neuse souden
Da Vari an Enez humblamant ho peden,
Neuse en un instant an avel a droas,
Hag ous an tan estlam antier en em viras.

Breur ar bellec ar Garff en eur punç dôn meurbet,
D'an oad deus a bemp bloas, allas! a oa coeet;
Goestlet a oe timat da dempl sacr an Enez,
Iac'h, dinam, hep gouli a oe tennet er-mæs.

Eur map da lan ar Meur, deus a drev a Sant-lan,
O vean o c'hoari joaüs, iac'h ha dinam,
Un accident funest a eruas gantan,
A droas he visach voar he scoa gleiz dean.

Douguet a oe d'ar guer perclus he oll vembro
Ha rentet immobil, ma sonjent oa maro.
He vam baour, p'her goelas, a ies prest d'an daoulin,
Hen goestlas en ho ti, o rouanes divin.

Sant Nicolas, escop, en deus ressuscitet
Tri vuguelic vian en eur charnel sullet;
Sant Renot, gouir vignon da Jesus, map Doue,
D'ar pemp buguel maro a rentas ar vue.

Eur verc'h da lan Vindren, o coean divoar varc'h,
An oll he c'hondaone, a oa maro avoalc'h;

He zad quez affliget a deuas d'he goestlan,
E man c'hoas en bue: certen eo quement-man.

Er guer a Landreguer, en punç an hospital,
E coeas eur buguel dre eur malheur fatal,
Eur sœurs, p'hen goelas, 'n em strinquas d'an daoulin,
Hen goestlas d'an Enez, en paros Goudelin.

Soutenet voar an dour, evel eur Moïses,
Iac'h, dinam, hep gouli a oe tennet er-mæs,
Ma lare'n oll queris n'efoa stoquet ous min,
Dre ma oa conservet gant'n Enez Goudelin.

Na ouffen birviquen rapportin en antier
Ar miraclo a ra pep lec'h dre ar c'hartier;
Voar vor ha voar douar dre oll eo invoquet,
A vro C'hall hag a Vreiz a deu pelerinet.

Neb a so afflijet gant drouc-corf ha gourto,
Deut betec en Enez, hag a gavo louzo;
Evel ma lavaras Jesus d'eur femelen
Bet enpad trivoec'h vla gant drouc quein ha crozen.

A baros Goudelin, Joseph ar Gonidec,
Assambles gant he vreur oa un nosvez cousquet,
Ha pa savas he vreur a guichen he goste,
Allas! e oa maro ha collet he vue.

He vam baour, p'hen goelas, a deuas d'he voestlan
Da chapel an Enez, eur plaç ar zantelan,
Neuze en un instant e teuas da barlant
Ous he dad ag he vam a oa eno present.

Pa lennan ar Scritur, a voelan rapportet
Eo ret bean importun d'hon Salver biniguet,
Na goll james courach evit poan na clenvet,
Hag e vefomp en env gant Doue curunet.

Goeach-all en Cana teuas eur groec santel,
Importun ha hardiz, en mesq an ebestel,
Da grial, da voelan dre ar vro voar he lerc'h,
Ma c'h obtenas d'ar fin ar iec'het 'vit he merc'h.

Rapportet am eus d'ac'h un niver miraclo
Capabl da bersuadi da dont da c'houll graço ;
Na vet quet quen ingrat da laqat en oubli
An oll graso patant on deus bet diganti.

M'ho ped, Goudelinis, bevet en union,
Ha quemeret exempl dious ho taou berson ;
Bevomp oll en guir beoc'h, an eil gant eguile,
M'en em voelfomp en env un de gant an æle.

En Enez, christenien, e receiver graço,
Induljançou patant, pardon d'ar pec'hejo :
Goelet a rer ar bull, n'en deo cuzet ous den,
A guement en deus c'hoant d'he voelet ha d'he len.

Ha p'on deus an enor da gavet'n hon c'hanton
Eur chapel quen devot da Rouanes an tron,
Pedomp-hi da vean hon gouir avocades
Dirac he mab Jesus ebars en he bales.

Jesus, mab ar Voerc'hes, m'ho suppli hag ho ped,
En hon heur divean truez ouzimp ho pet,
Ma'c'h ellimp ho coelèt el lez celestiel
Gant ho Tad, hag ho Mab hag ar Speret-Santel.

Eur map da Job Brient, a baros ar Merzer,
A oe daou de collet, coeet en eur rivier,
He dad a diredas a-neuse d'an Enez,
Eur c'hrucifi arc'hant a brenas d'ar Voerc'hes.

Eur map d'Ervoan Querou, a Sant-Ian-Kerdaniel,
Coeet ebars'n eur punç tregont troadat donder ;
An dud, ous her goelet o tonet da goean,
Hen goestlas d'an Enez, e man c'hoas o vevan.

A baros Goudelin, Frances Cariou hanvet,
En Panverit-Bescont, 'n eur punç dôn oa coeet ;
An dud, ous her goelet querquent ha ma coeas,
Hen goestlas d'an Enez, e man en bue c'hoas.

En ilis Goudelin, an trizec a vis maë,
A oa croguet an tan, an oll dud a oar se ;

Goestlet oe da Vari, hon rouanes divin,
Patrones an Enez, en paros Goudelin.

A baros Goudelin, eur map da Querhardi
A oa o tennan mein ebars en eur vengleu ;
Pa oa cals occupet, ne sonje droug ebet,
Ar vengleu voar nean, allas ! a so coeet.

Tennet e bet er mez perclus he oll vembro,
Rentet oa imobil, ma sonjet oa maro ;
He dud paour afflijet a deuas d'en goestlan
Da chapel an Enez, e man c'hoas o vevan.

Deus ar guer a Guengamp, eur map da Pierr Hlec
A oa o c'hoari joaus voar ar pave ;
Pa oa n'em divertissa, ne sonje drouc ebet,
Eur har voar nean a so bet tremenet.

An oll dud voa presant a lare oa maro ;
Preservet ez eo bet dre ar c'hras an envo :
He dud paour afflijet prestec he en goestlas
Da Vari an Enez, e man en bue c'hoas.

A baros Goudelin, Fanch-Mari Gorbél hanvet,
D'an oad deus a daou vla, n'eur punç dôñ voa coeet :
He dud, bras glac'haret, en goestlas prest neuse
D'Itron Varia'n Enez, e man c'hoas en bue.

An eil sul a vis goulén a man de he fardon :
Ar Pab 'n eus accordet d'ar bobl a bep canton
Induljançou plenier ebars er chapel-man
Da guement guir gristen a ia d'he bizitan.

Adgret ha copiet er bla seiz ha tri-uguent,
An de quantan' vis mae, evit rei da entent,
Gant Pierr ar Bars, eun den fur ha prudent,
Vit espliq miraclou hon Mam oll buissant.

